


AN TRI ROUE

Komzou an Ao. BAYON.

Ton gant An Ao. Dudius.


Kenta Ioder: « SELLOMP! »



Eur ste - re - den e deuz splan-net, An tri Roue




o deuz he gue - let. A - na - ve - zet o



deuz enn - hi Am-brou-ge - rez dous ar Mes - si.

- | | |
|--|---|
| <p>1. — Eur Stereden e deuz splannet.
An tri Roue o deuz he guclet.
Anavezet o deuz enni
Ambrougerez dous ar Messi.</p> <p>2. — O velet ar Stereden vrao
An Tri Roue ' lavar etrezo :
« Diguezet eo an amzeriou
Kanet gant ar profesiou.</p> | <p>3. — 'Vel ar frouez euz ar bleunio
Ganet eo Salver ar poblou.
Deomp da heul e Stereden,
Da velet e pe deach 'ma-hen.</p> <p>4. — Fors e pe leac'h ema ganet,
— Ti soul pe di alaouret —
Deomp da rei hor c'harantez
D'an hini 'ra deomp madelez.</p> |
|--|---|


Eil loden: « DEOMP! »




Ha se - tu int dre an hent - chou, Ep



aoun e bed rag ar c'ho - jou Leun a bep



seurt loe - ned gou - ez: Ho feiz a zo kren-voc'h bem -



dez, Ho feiz a zo kren-voc'h bem - dez.

- | | |
|--|---|
| <p>5. — Ha setu int dre an hentchou,
Ep aoun ebed rag ar c'hoajou
Leun a bep seurt loened gouez?
Ho feiz a zo krenvoc'h bemdez. (bis)</p> <p>6. — En noz ar Stereden ' splanne,
Da ziskuez hent d'an tri Roue;
Hag ar stered all dirazi
A guze, ma c'hellfe skedi.</p> | <p>7. — Pell amzer e rankjont ba'e,
Dre hentchou diez, noz ha de.
Mes biskoaz 'ne gelljont kalon
O tigas peb e zelezon.</p> <p>8. — Ha pa dardaz ar Stereden,
A-uz d'eur c'hraou dister ha ien,
E kavjont ar C'hrouadurik
Kousket var barlen he Vammik.</p> |
|--|---|